

13.

Beach vad d'hor bagig er bed-man !  
D'hon ene beach vad ive !  
Gras deomp, goude hon tremenyan,  
Da zouar' e porz an ee !

An Aoutrou de Treanna, euz a vaner Kerazan,  
o veza kouezet en eul lenn doun, hag o veza  
prest da veuзи, a voestlaz sevel eur japel d'ar  
Verc'hez. Saveeteet gant Mam Doue, e ialc'haz  
d'he c'her, ha sikouret iv'e gant arc'hant ha  
bolonitez vad ar gristenien euz tro-var-dro, er  
blavez 1699 e reaz sevel, e parrez Plogoff, ar  
japel-ma da Itron Varia ar Veach-Vad.

Daou pardon ar bloaz a zo e Beach-Vad.  
Unan, ar pardon braz, a zo d'an eil a viz  
gouere ; egile d'an eil sul a viz guengolo. —  
Da oll goueliou ar Verc'hez ha d'al lun Fask, e  
vez ive oferen bred er chapel-ze.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 4 Octobre 1892.

E. FLEITER.

Kemper, mouillet e ti de KERANGAL.

BN1-3-058

DISKAN

KANTIK

ITRON VARIA AR VEAUCH-VAD

E PARREZ PLOGOFF

DISKAN

Itron Varia ar Veach-Vad,  
Hon hentchit var ar mor braz,  
Dreist pep tra mirit hor bagig,  
Pa vimp o tremen ar Raz.


1.

Var eul lenn o vont da veuзи,  
Aoutrou Maner Kerazan.  
A voestlaz sevel deoc'h eunn ti :  
Setu hen savet aman.

2.

D'he beurober al labourer  
Hag ar pesketaer, laouen,  
Var arc'hant perc'hen ar maner  
A lakeaz ho guenneien.

*Hu dance*



3.

M'ar bezit deomp, Guerc'hez santel,  
Eur Yam douz, madelezuz,  
Ni zalc'ho ive ho chapel  
Bepret kaer, ato skeduz.

4.

Hon treid var eur blanken tano,  
Ni vel beindez an danjer,  
C'hui, o Guerc'hez, hon diouallo :  
Hor bagig zo ken dister !

5.

Pa ve dirollet an avel  
Goest d'hor skei ouz ar c'herrek,  
Ni a zell varzu ho chapel  
Ouz ho pedi kalounek.

6.

Evel eun toar-tan benniget,  
C'hui a ro d'eomp sklerijen,  
C'hui zisen ar vortolodet  
Ouz kounnar an tarziou guen.

7.

E boaë an Aniaoun, o Guerc'hez,  
Kalz, siouaz, a zo chommet ;  
Hon tûd ho defe dienez  
Ma vemp ni ive kollet.

8.

Truez eta ! e peb amzer,  
D'ar martolod roït skoazel,  
Var he vag beillit, Mam dener,  
Pa zalc'ho sonj euz ho chapel.

9.

Mes dreist peb tra ni a c'houlen  
Silvidigez hon ene ;  
Ar bed zo evel luc'heden  
Dirag an eternite.

10.

Ni fell deomp, koustet pe gousto,  
Mont d'ho kuelet er bed all ;  
Dionallit hor c'haloun ato  
Diouz bilim an techou fall.

11.

Ouz bro Frans hag ouz hor parrez  
Taolit eur zell truezuz :  
Grit dezo ho diou a nevez  
Senti ouz ho Mab Jezuz.

12.

Bag sant Per, an Iliz santel,  
A zo ive goal gaset ;  
Evit he harpa er vrezel  
E klask ho tourn benniget.